

Arnodenn dre gomz an DNB

Kinnig:

a-unan¹

daou ha daou²

ANV : _____

Kentanv : _____

Klasad : _____

Deiziad:

Juri #: _____

Div lodenn a zo d'an arnodenn :

un eztaoladenn hag un eskemm gant ar juri da heul.

¹ Kinnig a-unan: eztaoladenn 5 munut hag 10 munut eskemm.

² Kinnig daou ha daou: eztaoladenn 10 munut (dav eo d'an emstriverien bezañ dasparzhet mat ar gaoz etrezo).

Titl ar raktres:

Doare an oberenn (levr, film, taolenn...):

Kudennadur:

Gallout a ra an emstriver kemer harp war: ur skignadenn, un enrolladenn, un diell niverel met an eztaoladenn eo ar pal. Dav eo d'an emstriver sevel liammoù etre an danvezioù, diskouez ar preder hag an anaoudegezhioù tapet.

War evezh e vo ar juri da bouezañ war sell hollek hag etredanvezel ar raktres.

A – Mestroni an ezteurel dre gomz	/50
B – Mestroni an dodenn	/50
Hollad	/100

A – Ezteurel dre gomz dirak selaouerien

A1 – Dilhad / jestraouiñ / selloù / dalc’h			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
<ul style="list-style-type: none"> • Emzalc’h difoutre • Tamm striv ebet war an dalc’h • Ne sell ket ouzh ar juri 	<ul style="list-style-type: none"> • Emstrivad lentik, • Strivoù a zo koulskoude • Ne sell ket ouzh ar juri alies 	<ul style="list-style-type: none"> • Emzalc’h reizh • Selloù reoliek ouzh ar juri 	<ul style="list-style-type: none"> • Seven • Dalc’h ha dilhad reizh • Sellet a ra ouzh ar juri

A2 – Barregezh da zistagañ ouzh e/he notennoù			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
<ul style="list-style-type: none"> • Lenn a ra tra ken 	<ul style="list-style-type: none"> • Lenn a ra met strivoù a vez da distagañ ouzh ar skrid gwech ha gwech all 	<ul style="list-style-type: none"> • Un nebeud frazennoù a zo bet lennet 	<ul style="list-style-type: none"> • N’eo ket bet implijet an notennoù (pe en un doare dreistordinal)

A3 – Merañ an amzer (5 munut etre digoradur ha klozadur)			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
<ul style="list-style-type: none"> • Tamm aozadur ebet • N’eo ket bet doujet ouzh an amzer 	<ul style="list-style-type: none"> • Amzer doujet met hep heuliañ poell ar gaoz 	<ul style="list-style-type: none"> • Aozadur a zere met diouer a amzer da glozañ 	<ul style="list-style-type: none"> • Aozet mat amzer meret mat

A 4 – Live yezh / ezteurel sklaer, da vezañ klevet mat ha distaget brav			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
<ul style="list-style-type: none"> • Geriaoueg voutin, nann azasaet d’an dodenn • Diaes da glevet 	<ul style="list-style-type: none"> • Geriaoueg treut pe dizampart, • Treuzimplij troiennoù zo 	<ul style="list-style-type: none"> • Frazzennoù savet brav • Geriaoueg azasaet • Gouest da adlavaret da vezañ komprenet mat 	<ul style="list-style-type: none"> • Kaoz sklaer • Live yezh brav

A 5 – Ezteurel ur sav-poent / arguziñ			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
<ul style="list-style-type: none"> • Ne rann sav-poent ebet • Ne vez roet displegadenn nag abeg ebet 	<ul style="list-style-type: none"> • Klask a ra arguziñ pe displegañ gant skoazell ar juri • Arguzenn ha skouer a vez mesket 	<ul style="list-style-type: none"> • Arguzet gant harp skouerioù. • Poellek met dizampart a-wechoù 	<ul style="list-style-type: none"> • Arguzet gant poell hag aozadur, • gouest da gemer evezhiadennoù ar juri e kont, reiñ a ra skouerioù ouzhpenn

Poentadur hanter hent A	/50
--------------------------------	------------

B – Mestroni an dodenn ginniget

B 1 – Respont d’ar c’hudennadur			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
• Kudennadur ebet	• Kudennadur hep respont	• Respont d’ar c’hudennadur mat dre vras	• Respont arguzet d’ar c’hudennadur

B 2 – Barregezh da genaozañ. Sevel ur steuñv			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
• Framm ebet, kaoz dizurzhiet, troet a dammoù	• Digoradur amresis, hir ar gaoz. • Steuñv diaes da heuliañ	• Poell sklaer daoust ma vez dizampart a-wechoù • steuñv digempouez a-wechoù	• Kaoz frammet hag aozet mat.

B 3 – Implijout ur c’heriaoueg resis e liamm gant an dodenn			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
• Geriaoueg ispisial ebet	• Un nebeud gerioù a-ratozh	• Geriaoueg ispisial met dizampart a-wechoù	• Geriaoueg resis, azasaet ha pinvidik

B 4 – Harpañ an eztaoladenn ouzh an diaporama, pe un harp all.			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
• Dave ebet d’an harp	• Menegoù lentik d’an harp	• Daveoù poellek d’an harp	• Daveoù poellek, ingal ha pinvidikaüs d’an harp

B 5 – Kaout ur sell barn war e/he dodenn, e/he (b)pled, sevel liammoù			
2 bt	5 pt	8 pt	10 pt
• Liamm ebet, pled ebet zoken goude goulennoù ar juri	• Menegoù hep displegadenn ebet	• Liammoù savet daoust d’an displegadennoù bezañ dizampart	• Liammoù savet dre natur hep broud ar juri ha deuet mat

Poentadur hanter hent B	/50
--------------------------------	------------

Evezhiadennoù gant ar juri (ma vez):

An eztaoladenn breved

- Diwar 100 poent eo (800 poent zo er breved)
- 50 poent `vo evit an titouroù roet ganeoc'h ha bezañ gouest da arguziñ ha da respont da c'houlennoù ar juri) hag an 50 poent war an doare kinnig (ezteurel dre gomz, live yezh) Dibabet eo an tem ganeoc'h: kinnig un oberenn arz bet studiet ganeoc'h e-kerzh ar c'helc'hiad 4 (5ved, 4re pe 3de). (arzoù ar gweled, film, sonerezh, lennegezh...)
- Ma tibabit kinnig ho staj micher, n'eo ket ar pal lenn dirak ar juri ho rentañ-kont met kentoc'h displegiñ peseurt gounid `peus bet eus ar staj.
- Gwelloc'h dibab un oberenn arz resis, ne c'heller ket kinnig oberenn un arzour en e bezh e-kerzh un eztaoladenn ken berr.
- N'eo ket ar pal ober un diverradenn eus an oberenn, kentoc'h respont d'ur c'hudennadur, dielfenniñ, arguziñ ha reiñ ho soñj.
- Ne vo ket kentelioù evit prientiñ an eztaoladenn, dreist-holl er gêr vo prientet.
- Gallout `rit tremen hoc'h unan pe daou-ha-daou ma kavit unan all laouen da genlabourat war ar memes sujed ha c'hwi.
- Hirder an eztaoladenn: 5 mn kinnig ha 10 mn goulennoù gant ar juri pe 10 mn ha 15mn ma tremenit daou-ha-daou.
- Un diaporama `vo savet ganeoc'h (tro-dro 5 diell) evit skeudennaouiñ hoc'h eztaoladenn. Tremenet `vo dirak ur juri daou gelenner eus ar skolaj.
- Titouroù all war <https://lewebpedagogique.com/istorgeo/2021/05/10/arnodenn-dre-gomz-ar-breved/>
- Sevel an diaporama: <https://lewebpedagogique.com/istorgeo/2021/04/19/sevel-un-diaporama/>

10 reolenn bennañ eztaoladenn ar breved

- Mousc'hoarziñ, bezañ seven, diskouez bezañ mennet (zoken ma n'out ket evit gwir !), Startijenn!!
- Distagiñ mat, kaozeal kreñv, komz flour (hep heu..., genre, du coup...)
- Mestroniañ ar c'horf, ar jestroù
- Ezteurel o klask dibegiñ diouzh ar skrid, sellout ouzh ar juri, chom hep treiñ kein
- Frammañ an eztaoladenn (steuñv sklaer kinniget e penn-kentañ an diaporama) evit repont d'ar c'hudennadur `peus choazet.
- Merañ mat an amzer (5 mn: berr kenañ eo!). Gallout `rit padout betek 6 mn d'ar muiañ tout, ket muioc'h!
- Lakaat war e alc'hwez USB an diaporama e stumm PDF ouzhpenn Impress
- Displegiñ mat pep diell diskouezet en diaporama
- Chom hep skriviñ frazennoù war an diaporama
- Goulennoù ar juri: displegiñ mat e soñj: chom hep respont ya pe ket hep arguziñ